


XI

Diredit, bugale-vian,
Da veled ar Mabik Jesus.
Hèn ho kar, karit anezhan,
Hag evelt'han bezit sentuz.



N E D E L E C

XII

Ma kêr Jesus kement he Vamp,
Eô dre ma ze bêt ar Verc'hezad.
Atô dibec'h, atô dinam,
Iit da skôl ar Guiniveleza.

J. T.

IMPRIMATUR :

A. GADON,
Vicaire général.

Lambézellec, 20 Décembre 1907.

Moderato F. M. B.

E - lez Dou - e, deuz an En -
 vou Pe - rak oc'h a - ma dis - ken
 net? Pe - tra ' la - var ho kan - ti -
 kou A dreuz an noz skle - ri - jen -
 net? Pe - tra ' la - var ho kan - ti -
 kou A dreuz an noz skle - ri - jen - net?

I

Elez Doue, deuz an Envou
 Perag, oc'h ama diskennet ?
 Petra ' lavar ho kanticou,
 A dreuz an noz sklerijennet ?

II

Da heuill hor Mestr var an douar
 E tispakomp hon eskel gouenn,
 Dezhan ' rankomp kana gloar,
 Gant hor mouez hag hon telenn.

III

Gant hon telenn hag hor mouez
 « Gloar dezhan ! gloar d'he Dad !
 » Ha var an douar, levenez
 » D'an holl dud a volentez vad. »

IV

Ne glaskit ket en eun ty aour
 Kavel ho Toue, pastored.
 Eun doën blouz, eur c'hraouik paour,
 Cetu palez Salver ar bed.

V

Lezit ho tenyed er parkou...
 Hên a vezo pastor ive.
 Kinniguit dezhan oanigou...
 Oan eo c'hoaz, oan Doue !

VI

Oan Doue deuet da zamma,
 Var he chouk, pehejou ar bed.
 Peher, daoust hag o tond ama,
 Da galon n'hen d'o keuz ebed ?

VII

Oh ! tomma ' raï, me hoar er vad !
 Astenn a ra d'id he zaouarn.
 An daelou deuz he zaoulagad,
 A deuzfe 'n dir hag an houarn.

VIII

Deuit, tud paour ha tud entre ;
 Daoulinit hep aoun dirazhan.
 Hên ' zo paour ha dister ive.
 Da guenta oc'h galvet ganthan.

IX

C'hui, d'ho tro, tud a renk huel,
 Tud gueziek ha mondianed ;
 Ounthan eo red beza henvel.
 Deskit-hên gant a' Rouaned.

X

Tennit dezhan ho kurunenn,
 O kinnig myrrh, ezans hag aour,
 Dezhan e rit an aluzenn,
 O ranna danvez gant ar paour.